

290

Clemvan.

(492, suite)

Bonjour dêc'h, Perrinic, calz a hent a meus grêt,
 N'espermân get parzou evit dont d'ho quelet;
 Glac'har zo em c'halon, gout ouzoc'h ar sujet:
 Decriet on bet deoc'h gant va enemiet.

Calomniet on bet ha choqet em honor
 Gant certen goal-deodou ne maint get a bel bro;
 Doue am c'honsolo, me a zo affliget:
 Re bonner eo va c'hroas, Perrin, va zicouret.

En despet d'ar jalousi ha d'an ambition,
 Me ho car, Perrinic, eus a greis va c'halon:
 Graç d'en em velet un deiz dirac Doue,
 Pa na zomp eureujet, hervez hor bolonté.

(493)

Cetu en bêr amzer êru ar chenchamant;
 Distroet an avel ha casset an tourmant:
 An eol a virionez neus va justifiçet
 En qever va Ferrin: Doue ra vo meulet!

Ho saludi a rân, assamble honorall,
 Tud chentil, bêleren ha paysantet vad;
 Clemmer a rân va gueren, leun & meus-y carquet,
 Hac e zân d'e evad d'o yec'het, mignonet.

Na vez get a victor, ma na vez bet combat;
 Amâ e zeo pleguet an droug dindan ar mad:
 Cetu ni, va Perrinic, gant joa vras demezet,
 Graç deomp da vont d'an ên etoues an oll celes.

(Vol. II, p. 492-493).
 6 stv. numérotées.